

404

Farceres.

(247, suite)

Ur paour q'ez poussant n'en devije james
 Sonch eus e bec'hejou, abars mont da gôves ;
 Ur c'homme charitapl a lavaras dezân :
 « Cleo, mar em ententes, qea d'ar quër, emezân,
 » Ro d'as creg var e faç, ur grabanat esqern,
 » Mes sco a doare vad, ne deu qet d'e espern. »
 Mont a eure d'ar quër. Chavedat da Janned.
 — Cos hailloun, emezi, lounqer, loen debauchet ;
 » Qea da c'hoarem Vicant, qea da laeres e gol,
 » Qea da velet greg Yvan, qea da velet greg Pol,
 » Qea vel ma zout custum da zilsta qezec,
 » Qea da zivodil da zaout e pare da amezec,
 » Qea da laeres scodou, qea da froda butun,
 » Qea d'an davarn, meznier, evel ma zout custum,
 » Qea da glasq penseou, ha gant un tol qil-croc,
 » Tor ebenn d'ar perc'hen, mar sonche dont arauc.
 » Hugunot ! pet sulves oude bet e sermon ?
 » N'out nemet ur c'hi fall, un impi, un haillon. »
 Na felvezat[is] netra na vije doganet ;
 Mes ennes so lur c'has d'an escop reservet.
 An ozac'h, p'en devoe selaouet e beden,
 En em four da goves d'ar red neuze souden.

(248)

(Vol. IV, p. 247-248).